

# Kantic Sant Coulit

Hor patron mat Sant Coulit truez en han' Doue  
 Taolit varnomp ho pennoz, ni zo ho pugale ;  
 Skoazellet gant ho kalloud, dre sikour ho peden  
 Ni vezo gwir gristenien, stard ato n'hor c'hreden.

Ginidik eus Breiz tramor, deus eur familh gristen.  
 A-vihanik c'hwi c'houzanv ar boan hag an anken ;  
 Ar brezel n'ho kornik-bro, siwaz zo dirollet  
 Araok ar Zaozon dizakr an holl a renk tec'hët.

Gant ho kerent harluet, kollet o feadra,  
 N'eur porz bihan eus Kerne, c'hwi teu da zoutara ;  
 C'hwi a zo digemeret tostik da ribl ar mor,  
 N'eur manaty c'hwi gavo ha repu ha goudor.

E Landevennek savet, diskib da Wenole,  
 E skeul an holl vertuziou, c'hwi bignas hep dale ;  
 Dre ho skwer, ho komz nerzus, er c'hornik-ma eus Breiz  
 E kalon hor c'hentadou oa garanet ar feiz.

Grizioù ar feiz oa eat doun, rag goude eiz kantved  
 An tad Maner d'hon tadou helle c'hoaz lavaret :  
 « N'eo ket ganet ar breizad a nac'ho e Zoue  
 Mari jomm ato e vamm, ha Jezus e Roue ».

Ar brud eus ho santelez, a oa eat a bell bro,  
 Ar Pab bars en Iwerzou da eskop ho 'hanvo ;  
 Kear Kildare gant joa ho reseo vel eun tad  
 Hag eno kalz bloaveziou, c'hwi rai ar gwella vad.

E barr an Envou brema, c'hwi zo tost da Jezus  
 E kenver ho pugale bezit madelezus ;  
 Hor zikourit da vale e skeud ho santelez  
 Ni gano ho meuleudi eun deiz gant an Elez.

Keit ha ma redo an dour hed ha hed ar ster Aon  
 Tud Sant Coulit ho karo hag ho meulo dizaon ;  
 Epad hor buez fidel da feiz hon tadou koz  
 Grit ma vezimp unanet ganeoc'h er Baradoz.

Imprimatur :

Kemper, 15 a Wengolo 1943.

P. MESSENGER, *Vikel bras.*

